

Kantik Sant Jermen

Eskob Auxerr.

1.

Henor ha gloar da Zant Jermen,
Dezan kasomp hor guir beden.
Kerlaziz oll, a greis kalon,
'Lavar hirio d'ho Zant Patron :

Diskan :

Kanomp, kanomp laouen
Meuleudi Sant Jermen !

2.

Henor ha gloar, eskob santel,
Ato skouer vat ho tud fidel,
Dre ho preder d'ar pedennou
Ha d'ar rusta pinijennou !

3.

Henor ha gloar, eskob karet
Gant an dud paour ha glac'haret :
Ho madelez, hed an henchou
A daole puilh madoberou !

4.

Henor ha gloar, eskob brudet
Evit al lufr eus ho spered :
E kalz broiou, gant gouiziegez,
Ho peus hadet ar virionez.

5.

Henor ha gloar 'vit ho kalloud
Eneb peb drouk ha peb darvoud,
Eneb Satan hag e ardou
Treat'het oll gant ho purzudou !

6.

Henor ha gloar, a-berz Bro-C'hall :
Sakret ho poa 'vit he diouall,
Diouz eur bobl gouez prest d'he breva,
Ar verc'hez c'hlan Genoveva.

7.

Henor ha gloar 'vit ar skoazel
Roet da Vreiz-Veur, hed ar brezel
Great gant ar Gaou d'ar Virionez,
Gant ar Gounar d'ar Garantez.

8.

Henor ha gloar, 'vit ar c'houenchou
Savet eno tost d'an aochou :
Rak ac'hano 'teuas e Breiz
Ho tiskibien gant ar guir feiz.

9.

A-dreus hor bro, o deus skignet
 Hoc'h hano dous ha benniget,
 'Vit skoazella, da virviken,
 An oll tiegeziou kristen.

10.

Ia, trugarez, gloar hag honor
 D'an neb en deus harpet Arvor,
 Eneb armeou eur mestr garo,
 Betek ar pred eus e varo !

11.

Mil bennoz d'eoc'h, o Sant Jerman !
 Seveni 'rit kement peden,
 Kement mennoz a nij d'an nenv
 Var diouaskel eur fizianz krenv !

12.

Grit ma lintro splann 'vel an deiz
 En hor spered sklerder ar feiz ;
 Grit ma talc'himp sonj ho skoueriou,
 Evit difen hon oll guiriou !

13.

Hon diouallit diouz peb klenved,
 A wask ar c'horf hag ar spered :
 Hon diouallit diouz ar boan benn,
 Hon diouallit diouz an anken !

14.

Gant an ezen, mintin ha noz
Grit ma nijo keit ho pennoz
Ha m'en em led son ar c'hleier
Var hon tiez, hor parkeier !

15.

El labour ni vevo santel ;
D'an oferen ni vo fidel ;
Komz ar beleg ni a glevo ;
Korf hor Zalver ni 'resevo.

16.

Hed hor buez, ni 'vo nerzuz
Da vale var roudou Jezuz,
Daoust d'ar skouer fall, ha d'ar geier
A red ker stank, en hon amzer.

17.

Ia, Sant Jermen, ni labouro
Evit Doue, evit ar vro,
Betek ma 'z imp d'ar baradoz
Da gana d'eoc'h kaeroc'h bennoz !

Imprimatur :

Kemper, 8 a viz Mae 1913.

A. COGNEAU,

Vic. gén.